

Me, Kourjetenn

Fichenn bedagogel savet gant Manon Renault evit ar 6^{vet} ha 5^{vet}



Kinnig ar film :

Me, Kourjetenn zo ur film [sevenet*](#) gant Claude Barras. Ur film bevaat eo, gant teknik ar *stop motion*. Gant an teknik-se e vez degaset buhez d'ar film foto-ha-foto : an tudennoù (hag an traoù tro-dro) a vez staliet gant an dorn ha graet ur foto. Fiñvet e vezont un tamm ha graet ur foto all, ha kement zo. An holl draoù a vez gwelet er film zo bet savet gant an dorn, kinkladur hag all.

Meur a briz en deus gounezet ar film.

Kontañ a ra ar film istor Kourjetenn, 9 bloaz, hag en em gav hep den ebet evit ober war e dro. Lakaet e vez en un ti-bod gant bugale all rak evel ma lâar e genseurt Simon : «Den na gar ac'hanomp ken.» Koulskoude, a-drugarez d'ar vignoned kavet du-hont, ha da sikour an dud a labour eno, emañ o vont da gompren petra eo bezañ karet ha bezañ graet war e dro.








© Charlotte Désigaud

* seveniñ : kas da benn, aozañ. Sevenner pe sevenerez ur film eo an hini zo e penn an traoù.




Deskrivañ an tudennoù

Evit pep tudenn, deskrivit he neuz, he fersonelezh hag ar pezh a ouzoc'h eus he familh.

| Tudenn | Neuz | Stad ar familh | Personelezh |
|---|------|----------------|-------------|
|  Kourjetenn | | | |
|  Camille | | | |
|  Simon | | | |
|  Raymond | | | |
|  Alice | | | |

Fromoù

Setu un nebeud mareoù tennet eus ar film. Soñj ho peus eus ar pezh a c'hoarveze er mareoù-se ? Peseurt from a sav en dudenn a welomp war ar skeudenn ? Hag ur from negativel eo ? Petra a ra an dudenn pe an tudennoù evit bezañ eürusoc'h ?

| Mare ar film | Petra a c'hoarvez ? | From (negativel pe pozitivel) | Diskoulm |
|---|---------------------|----------------------------------|----------|
|  | | | |
|  | | | |
|  | | | |






Dispakañ e soñj







Leugnit ar frazennoù dindan.

| | |
|---|--|
| Ar mare zo plijet din ar muiañ er film eo... | |
| peogwir... | |
| Ar mare en deus graet aon din eo... | |
| peogwir... | |
| Ar mare en deus lakaet ac'hanon da c'hoarzhin eo... | |
| peogwir... | |
| Ar mare am eus kavet trist eo... | |
| peogwir... | |
| Ar mare en deus lakaet ac'hanon da fuloriñ eo... | |
| peogwir... | |
| An dudenn a blij din ar muiañ eo... | |
| peogwir... | |
| An dudenn a zisplij din ar muiañ eo... | |
| peogwir... | |

Taolenn an tudennoù : skouerioù respontoù

| Tudenn | Neuz | Stad ar familh | Personelezh |
|---|---|--|---|
|  <p>Kourjetenn</p> | Daoulagad gell, blev glas, n'eo ket gwall vras. | Dispartiet eo e dud hag emañ o chom gant e vamm. Mervel a ra-hi e deroù an istor. | Boas eo da vezañ e-unan, tamm-ha-tamm e anavez ar blijadur da gaout tud a fiziañs en-dro dezhañ. |
|  <p>Camille</p> | Blev du ha hir, daoulagad glas. Bras eo. | He zad en deus lazhet he mamm hag en em zistrujet goude-se. | Kalonek-tre eo, n'he deus ket aon rak ar re all, nemet dirak he moereb. |
|  <p>Simon</p> | Blev ruz, fichet evel ur vananezenn, daoulagad glas, bras a-walc'h. | E dud a gustum kemer drogach. | Tagañ a ra ar re all alies met tamm-ha-tamm e welomp pegen kizidik e c'hall bezañ. |
|  <p>Raymond</p> | Daoulagad ha blev gell, mourroù. Ur boned war e benn alies. | E vab zo aet kuit, n'en em welont ket mui. | Jentil-tre eo gant ar vugale. Selaou a ra pa vezont o kaozeal ha klask a ra gwareziñ anezho. |
|  <p>Alice</p> | Blev melen, bepred dirak unan eus he daoulagad glas. Bihan eo. | He zad zo en toull-bac'h peogwir en deus gwallgaset anezhi. N'ouzomp netra diwar-benn he mamm. | Lentik-tre eo, ne gomz morse, trouz a ra gant traoù pa vez nec'het. Mignoniezh Camille a laka Alice da vousec'hoarzhin a-benn ar fin. |

Taolenn ar fromoù : skouerioù respontoù

| Mare ar film | Petra a c'hoarvez ? | From (negativel pe pozitivel) | Diskoulm |
|---|--|--|--|
|  | <p>Kourjetenn zo kaset d'an ti-bod gant Raymond. Raymond a ya kuit.</p> | <p>Aon en deus rak ar pezh a zo dianav, ar santimant en deus bezañ e-unan.</p> | <p>Tamm-ha-tamm ec'h anavez an ti-bod, displeget e vez an traoù dezhañ gant an dud gour hag ar vugale all. En em santout a ra eno evel er gêr.</p> |
|  | <p>Simon en deus laeret kanedig Kourjetenn, a zo un dra chomet diwar-lerc'h e vamm.</p> | <p>Fuloret eo Kourjetenn.</p> | <p>Camille a bak en-dro ar c'hanedig hag a ro anezhañ en-dro da Gourjetenn, a zo dinec'het.</p> |
|  | <p>Bugale an ti-bod zo kaset da vakañsiñ er menezioù.</p> | <p>Laouen int.</p> | |
|  | <p>En ur zistreiñ eus ar vakañsoù, Camille ha Kourjetenn zo deuet da vezañ tostoc'h an eil d'egile.</p> | <p>Amourous int, plijet int an eil gant egile.</p> | |
|  | <p>Kourjetenn ha Camille o deus tremenet un devezh gant Raymond. Moereb Camille a zeu da gerc'hat anezhi, fuloret-ruz.</p> | <p>Spontet eo Camille.</p> | <p>Sikouret eo gant he mignoned evit prouiñ pegen drouk e vez he moereb ganti.</p> |
|  | <p>Raymond a zegemer Kourjetenn ha Camille en e di.</p> | <p>Laouen int, krouet o deus ur familh nevez, leun a garantez.</p> | |